

AVANTURIOU UN DEN YAOUANQ

A VREIZ-IZEL,

*En pere e veler d'abord an Amour e
gemer e nerz, goude e vlancât dre an
dezir da studia, goude-se e fleurissa
gant mui a gourach, enfin en er gueler
disc'hriennet, hac an daou zen yaouanq
separet goude o oll amitie.*

Var an toniou a zeziro.

par Guillou de quiroque -




*proteu
qui vit
encore
1838*

E MONTROULEZ,

E ti LÉDAN, Imprimer, e traon Ru ar Vur.





AVANTURIOU
UN DEN YAOUANQ
A VREIZ-IZEL.

TOSTAIT oll, tud yaouanq pere form amitié,
Da c'hout penaus e commanç hac e coez adare;
Rac me a so den yaouanq hac em boa-hi formet.
Qen en dê hirio an deiz n'am boa-me e c'huitet.

Nep a lavarje din-me, bremâ eus ugent mis,
E coesjen er chadennou demeus ar yaouanqis,
Me a respontje dezàn gant un êr a goler:
Ne gredàn qet ve merc'het am grafe prisonier:

E bien, va breudeur yaouanq, bet òn en o frison;
Amaret gant o laçou bete griou va c'halon,
Ea ur joa, en un triomf, en un douçder barfet:
Neus qet a voelloc'h jolier vel ma zeo ar merc'het.

Jolierien ar prisoniou a so cri ha cruel,
A ro colo da gousqet d'an nep so prisonier;
Mes, er c'hontrol, ar merc'het p'o devo ho chadennet;
A roi dêc'h eus o guella, mat bras int da garet.

Evit clasq dêc'h ur portret demeus o amitié,
N'en deo qet rat din sevel ermes eus va goele:
Chom a ellàn em zomder, pa na meus qet a c'hoen,
Da gomposi d'am mestrez ha din ur ganouen.

Arça eta, commançomp digas var an tapis
penaus tremen an amzer e mesq ar yaouanqis:
Ne n'em laqai da guenta; rac se, ne fachit qet,

Na ve glac'har ho pe goude ,
 Liberte a so un itron
 D'an nep e c'hemer hep rêson ;
 Hac a ra poan speret d'an den
 Er bed-mâ pe sur en eben.

AR GOAS.

Va mestrezic , ur guir mad c'hoas :
 Hac e vijen e hirvout a viscoas ,
 Clêvet ur guer demeure ho pen ,
 E vijen e creis ho courc'hemen :
 Me a voa fall va esperanç
 Pa laqis ennoc'h va fianç.

AR PLAC'H.

Ho fianç ho poa laqet mad ,
 Ma consant va mam ha va zad.
 Cassit ur re betec enne
 Da gaout an eil hac eguile ,
 Ha dious ar respont ho pô bet
 Me a yêl ganêc'h d'o c'havet.

AR GOAS.

Casset emeus betec enne ,
 Betec an eil hac eguile ,
 Da gaout ho ligne enorabl ,
 Evit caout o bolonte vad ,
 Da gaout ho qerent en daou du ,
 'Tout e tolont ar brald dêc'h-u.

AR PLAC'H.

Mar dê guir ar pez a laret ,
 Me a ya ganêc'h d'ho c'havet.
 Bonjour , va mam , bonjour , va zad ,
 Cetu amân mab un ozac'h mad
 Fresantamant eus va gouleu :

Ni n'em soumet d'ho courc'hemen.

AN TAD HAC AR VAM.

M'ar d'oc'h ho taou en em choaset,
 ho tispertia a ve pec'het :
 Ni a ro deoc'h hor bennos hon daou,
 hac un nebeut eus hor madou ;
 Met e vo comz d'an autrou Cure,
 ha rei d'an daou den-màn o liberte.

bis.
bis.

FIN.



E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.



D'AM MUVA' CARET!